

CHANSON AR C'HAFE.

Var an ton ancien.

TOSTAIT oll, tud yaouanq, da glêvet ur chanson
Zo composet er blos-mâ gant sujet ha rôson.
An eferezet Cafe hac an eferien Güin
O deus bet grêt qement-mâ d'ho laqat da c'hoarzin.

Ar Güin a zo ul lieur zo formet gant Doue,
Hac a voa bet transplantet gant hon Tad côs Noe,
Nonpas evel ar C'hafe zo un dra invantet
Gant ur vreg malicius eus a vro an Durget.

Qenta ma teuas biscoas d'ar vro-mâ ar C'hafe,
Ne voa nemet an Noblanç a guement en eve,
Ha bremân an oll gommun a ya tout da eva :
An darnvoya anezo n'o deus qet a vara.

Bremâ me a zisclêryo ebars en abrege
Ar Chanson-mâ composet var sujet ar C'hafe
Etre daou den demezet père n'em reproche,
Unan balamour d'ar Güin, hac un all d'ar C'hafe.

Ebars er blos mil eiz cant hac unan varnuguent
E savas ar fachiri goude Gouel an Oll-Zent :
Ar vreg a yeas e qær gant ur boezellad ed,
Hac a foetas an arc'hant gant he c'homerezet.

Pa antreas er C'hafe, he deus bet lavaret :
Me gred, evit hon arc'hant, e vezimp servichet.
Digassit demp-ni Cafe hac iye Odevi,
Hac ur vontailad Liqueur vit en em regali.

Al Liqueur , an Odevi a savas en o fenn ,
Ma comansjont da zansal o feder diarc'hent ;
Plac'h an ed a lavaras : va arc'hant zo foetet ,
Me a efe ur banne , rac c'hoas em eus sec'het.

An teir all a lavaras neuze aboues o fenn :
Ret eo guelet , va c'homer , pegaument ar scoden ,
An hostises , pa glèvas , d'an ec'h a zo pignet
Pa voe aranjet ar gont e chome c'hoas ur scoet.

An hostises a laras : m'em eus roet da eva ,
Hac abars ma sortifot c'houi ranco va faea ;
Rac-se en em aranjit da baea ho scoden ,
Evidon-me a bromet n'ho po qet a dermen .

Ar merc'het en em selle hac o devoa poan beno ,
Pa n'o devoa qet arc'hant da baea o scoden .
Jaqeta a lavaras : me rîy va davancher ,
Ha te va c'homer Janned , a rey da vouchouer .

Unan demeus an ezec'h en deveus bet cavet
He devoa foetet e vreg ar som a bêvar scoet :
Quittât a ras e labour evit donnet en qær :
Ebars e ty ar C'hafe o c'havas o feder .

Hac evel ma c'hentreas , en deveus lavaret :
Ha ne heus-te qet a vez , lavar , greg debordet ,
Lezel eur buguel bian deomp-ni da lusqellat ?
An deirvet nos eo oumân n'em eus cousgat berad .

Aze amâ em c'hichen , ha ro peoc'h emezi ,
Qemer un tassat Cafe da dremen da anui .
Tao dîn gant da zour bervet : aoüalc'h e heus evet :
Qenta banne a evi , me garfe vez crevet .

Evidout-te , sac'h ar guïn , te vepris ar C'hafe ,
Ebars en hostaliri e vez cavet nos de :
An arc'hant a c'honees tout etro pad ar siun ,
Ne zeus qet re anezo da gaout Guio ha Butud .

Jarnicoton , emezàn , bremàñ ni rai ar bal :
Goude foetta va danvez , donet d'am c'haqetal !
Dre brontitud ur vazad a roas d'ar vreg qes ,
Ma tiscaras d'an douar Cafe , Dien ha Les.

Ar merc'het a lavaras o feder assambles :
Manget oc'h eus , va mignon , mont da sqli ho maoues ;
Sqüillet hoc'h eus ar C'hafe , c'houi a renq e baea ,
Pe bremà souden vantan ni ya d'ho tisvleva .

Ar peder blac'h animet a saillas varnezà ,
Hac au hostises ive e zisvleva :
Treinet e voe dre an ty , e zillat voe roguet ,
Hac e vrec'h betec e scoa gant ar C'hafe grillet .

Evel ma c'hallas achap , e commanças redet
En ur sellet var e lerc'h evel ur c'has fouetet .
Darbet è dlo , emezàn , casi coll va bue :
Me garfe e ve beuzet ar merc'het er C'hafe .

Etrezoc'h , goaset yaouanc , dioüallit ho crague
Pa zint da verza amann , na hentfent ar C'hafe :
Ar C'hafe so debochus , dre ma zè mad ha douç ,
Hac a ro tentation d'an oll merc'het lipous .

Dre ze hoc'h avertissàn , ezac'h eus ar c'hontre ,
N'it qet da glasq ho crague , ispicial d'ar C'hafe :
Mar hoc'h eus guers boutaillad ebars en ho codel ,
Qerzit d'an hostaliri da yelet Yan Vourdel .

Pa ven en hostaliri gant va c'hamaradet ,
Ur podat Güin em c'hichen , ve contant va speret ;
Arça eta , mignonet , evomp peb a vanne ,
Ha canomp oll ur Chanson var sujet ar C'hafe .

Ar C'hafe a ra domach ebars e peb canton ,
Ha mar dê quer en amann , ne dê qet hep réson :
An dien a ya ennâ bep guella eus al les ,
Ha ni entrezomp , goaset , a zébr hor bara sec'h .

Ni peurvuya, Canerien, a vepris ar Chafe
Ze so cos ma reprenomp ar merc'het ha grague ;
Ar Güin, pa er c'hemerer gant moderation ,
A ro courach d'or C'haner da gana ur Chansou.

Poent e cavàn finissa, amplic em eus comzet :
Efit er seurt a guerfol, me ne sourcian qet ;
Efit Güin, efit Cafe, Liqueur pe Odevi ,
Mæs dioüallit absolu da gavet fachiri. FIN.



CHANSON NEVEZ.

Me meus choaset ur Vestrez a Escopti Treguer,
Ar vrava crouadures formet gant va Zalver ;
Ia, ne zeus nemert-hi dindan ar firmamant,
A guement a vez crouet herves va zautimant.

Me zo ur Chloarec yaouanc o poursu va studi ,
Am eus lezet va leoriou , laqet em fantasi
Da garet ur femelen , fleuren an oll merc'het ,
Un objet fur ha parfet , gant an oll admiret .

Qenta m'am boe an enor , va Mestres , d'ho quelet ,
E voa e Béret Plunet , goude an Ofern-Bred :
Eno tre e remerqis ho craç hac ho féçon ,
Ho qenet , hac ho speret , hac ho perfection .

Ho taoulagad a verve evel an eol ardant ,
Ho tiou jot ru , ho tal guen evel un diamant ,
Ma teuis da lavaret em c'halon , em speret ,
E voac'h un Æl evurus eus an En disqennet .

O cessit , Cloarec yaouanq , ô cessit da bartant !
Goneet hoc'h eus va c'halon gant ho comzou charmant ;
Goneet hoc'h eus ar victor , ha me a vo qiriec
D'ho caret a vir galou gant enor ha respect .

Un de voan o pourmeni gant eur galon gontant,
O sönjal em Mestrezic, un objet excelant,
Pa glêvis aziouc'h va fenn ur voez o lavaret :
Ret è servicha Doue, lesit ho maya caret.

O pebes moez a glevân, va Doue-oll-buissant,
Pehini drompl va speret a va ententamant,
O prononç din un arret a separation,
O Doue pebes glac'har ha desolation !

Muya tra am gra nec'het hac a ra chagrin dlo,
Eo clevet al lapousset o cana a us din,
Ma laront din a ur voez : heuillomp ar C'hloarec qez,
Ha tachomp d'e gonsoli betec ti e vestres.


Venus, Mam da Gupidon, Roue ar Bayanet,
Pehini a zistruje an infideliqet,
A bedân da scuill varnon pep sort punition,
Mar manqâo-me d'ho caret, va douç, a vir galon.

Mar dê Doue a gowand, Cloarec, oboisset,
N'en n'eus netra refusabl da Redemptor ar bed ;
Bremân me a vel patant caret zo dinatur,
Carout hep beza caret a zo displijadur.

Bonjour déch', va mestrezic, bonjour dec'h à larân;
Cetu me deut d'ho quelet vit ar vech diveân,
Da brononç déch' un arret a separation,
Nemedoc'h am soulachfe, ranna rai va c'halon.

Autrou Doue, ya Douel petra rîn-me bremâ,
Dilezet gant ar bed oll, gant va douç da guentañ
Bremân me a renq ober evel an dursunel,
Pa ve collet ganti he far, en em les da vervel.

FIN.



CHANSON NEVEZ.

Var ton : *Ar Meliner.*

AR GOAS.

Débousjour déc'li , va douç Jannet , an daelou em daoulagad ;
Cetu me deut c'hoas d'ho queletqent sònjal dont d'ho quittat ,
Qent quittat an nep a garàn mui guet qement tra so'r bed ;
Pebes calonat evidon , goude beza re garet !

AR PLAC'H.

Meurbet ez on-me estonet , den yaouanq , ous ho quelet ;
Sesisset hoc'h eus va c'halon ous ho quelet quer manret :
Arrêtit , sec'hit ho taelou , ha disclêryit franchamant
Petra sinifi ho comzou , petra è ho nec'hamant.

AR GOAS.

Ho temeurancsur , va mestrez , zo em c'halon quer parfet ,
Qen na ouffen-me birviqen e lemel dious va speret :
Rac c'houi noc'h eus nemet mepris ha meprisanç evidon .
Ansavit brema hep fentis ha m'en em glêm hep résion ?

AR PLAC'H.

Me voar e zoc'h rentet captif certen d'an amouroustet ,
Dre moc'h eus lajet ho speret da re garet un objet ;
Un den yaouanq a dle beza mestr absolu d'e galon ,
Mes c'houi a so , var a velàn , guir esclav da Gupidon .

AR GOAS.

An aour , pa ve purifiet , a dremener dre an tan ;
Ha va c'halonic , va mestres , a zo henval bras outan :
Sulvui rit ous va dilezel , sulvui ràn ous ho caret ,
Ha ma zoc'h ouzin quer cruel , me zo douçen hoc'h andret .

AR PLAC'H.

Da betra teut d'en em dale , den yaouanq , d'am darempret?
Ne sönjtit mui en qementse , rentit tranqil ho speret ;
Laquit ar peoc'h en ho calon , ha sönjtit enni a gren ,
P'otramant hoc'h affection am zromplo a dra certen.

AR GOAS.

Me ya bremâ d'ho tilezel evel ur Gananeen ,
Mes me a grio mui-ous-mui qen na glêfot va feden ,
Ha pa ho po va approuvet ha gouët ha me ho car ,
E teufot neuze d'am c'harout gant ur galon hep e far .

AR PLAC'H.

Caer hoc'h eus clasq va zistrei gant ho comzou eloquant ,
Rac me a vo en hoc'h enep da viqen ferm ha constant ;
Qent e tisplantfac'h ar steret demeus an en gant ho tent ,
Evit n'o pe va distroet den yaouanq , dre nep sort hent .

AR GOAS.

Pel a zo demeus a amzer ec'h exercen an enor
Alies demeus a veach , va mestrez , da doul ho tor ,
Da guichen toul dor ho calon , o clasq antreal enni ,
Mes c'hui a so qen diréson , hac a zeu d'am refusi .

AR PLAC'H.

Pel amzer a zo tremenet ha qeit all a dremeno ,
Biqen james var va speret nep réson sur n'ho pezo .
Me ho ped deut d'am dilezel , rac-se-ta choasit ho plac'h
Biqen james n'o qemeràù credit ar pez a laràù dec'h .

AR GOAS.

Evit ho contraign d'am c'haret , me ho ped da viana
Da sönjal voamp hon daou choaset gant Adam , hon Tad qenta ;
Demeus al lezen naturel am c'hontraign d'ho caret ive ,
Lennet è demp en Aviel , gout a rit se coulz ha me .

AR PLAC'H.

Eleal assur , den yaouanq , certen ho carout a ràn .
Pa è guir ho meulàñ bemde d'ar merc'het eus ar vrô-mào ;
Ma vijent em possession , c'houi pije'r c'hoas anezo ,
Mes evidon me a bromet biryiqen sur n'ho pezo .

AR GOAS.

Preciussa tensor un den è certen ur galon bur ,
Qementse a zo qer guirion evel ma zê ar Scritur :
C'houi è va zenzor , va mestrez a Rouanez va c'halon ,
Ha mar don-me deut d'ho quelet , è gant guir intantion .

AR PLAC'H.

Me oc'h anave , den yaouanq , evit un den drol meurbet ,
Dre moc'h eus lajet ho speret da garet nep n'ho car qet ;
Mes choasit un all evidoc'h a ouffe ho consoli ,
Rac evidon n'allàñ pelloc'h chom amâo da ziscouri .

AR GOAS.

Ho quittat a ràn , va mestrez , pa è ret ho tilezel ,
Mes evit se va amitie a vezò bepret fidel ;
Poent è demp eta conclui , finissa ha lavaret
Penos è fachus da un den carout hep beza caret .

AR PLAC'H.

Ho quittat a ràn , den yaouanq , o rei déc'h evit qentel
Ar c'homzou caërmâ a lenner ebars er Scritur Santel :
Choasit Rouantelez Doue hac e justic da guenta ,
Qent ma vezò déc'h accordet hoc'h oll dezir er bed-mâ .

FIN.

E Montroulez , e ty LÉDAN , tu ar Pave .